

Belfast gant David Le Bourhis

David sikour din ! C'hoant am eus da veajiñ an dibenn-sizhun-mañ en ul lec'h bennak met n'ouzon ket pelec'h ! Ur mennozh az peus ?

Ya evel-just. Anavezout a ran ur gêr vuzhudus anvet Belfast. Kêrbenn norzh Iwerzhon eo. Aes eo mont di adalek Naoned gant ur c'harr-nij betek Dulenn ha goude mont gant ur c'harr-boutin betek Belfast. 1E30 e pad an nij ha 2e ar c'harr-boutin. Gellout a rez mont gant ar vag ivez adalek Rosko met kalz hiroc'h eo.

Mat-tre ! Ha petra ober ahont ?

Kalz traoù ! Ma'z peus naon, ur preti boued-mor mat zo e kreiz-kêr. Anvet eo Mourné Seafood. War ur blasenn kuzhet a-dreñv ur gourmarc'had emañ. Lipous-kenañ eo pesked hag eus ar vro.

Siwazh allergek on gant ar boued-mor.

N'eo ket sansubl, ur preti all zo ha n'emañ ket pell eus egile. Anvet eo Made in Belfast. E kichen iliz-veur santez Anna emañ. Estreget boued-mor a gaver. Gouzout a rez eo bet savet an Titanic e Belfast ?

Gwir eo ?

Ya, hag ur mirdi zo er porzh diwar-benn istor vag. Dedennus-tre eo. Un tamm ker eo met talvezout a ra ar boan. Ur weladenn teir eurvezh eo ha nag a draoù da welet. Gant ar memes bilhed e c'hellez mont da welet an Nomadic e-kichen ar mirdi. An Nomadic zo ar vag a oa bet implijet e Cherbourg evit kas an dud war vourzh an Titanic peogwir e oa re vras evit ar porzh. Amzer 'vo mont d'an davarn goude-se. Brudet eo Belfast evit ar sonerezh. Ma blij ar sonerezh hengounel dit, sonerien a vro Iwerzhon a zo o seniñ e pelec'h da Sadorn noz. Ma zavarn gwellañ eo ar c'hKelly's cellar. Sell mat, ur gwenn-ha-du zo e-barzh an davarn-se.

Ah ya, mat-tre, met pelec'h e c'hellan kousket ?

Chomet 'oan er Ramada Hotel pa oan bet e Belfast. N'eo ket re ger, ha lec'hiet mat eo. E-kichen an holl davarnoù hag an holl bretioù a zo mat. An eil deiz e c'hellez mont war an aod gant ur c'harr-boutin betek ar Giant's causeway. Gwerzhet e vez ar bilhedoù gant ti an douristed dirak an ti kêr. Ur veaj a bad an devezh a-bezh eo. Arabat chom re ziwezhat en davarn ma'z peus c'hoant da zihuniñ abred a-walc'h ! Dremwelloù kaer ha gouez a vez gwelet war an aod e norzh Iwerzhon. Porzhioù bihan, kastelloù kozh, liorzhoù, laboused-mor ha zoken ur pont graet gant kordennoù a-us ar mor. Gellout a rez mont warnañ ma'z peus c'hoant, met skrijus eo ma'z peus aon rak ar goullonder. Ur bourmenadenn blijus eo ha pa vez brav an amzer e vez gwelet Bro-Skos eus an tu all d'ar mor.

Brav e vez an amzer alies e Iwerzhon ?

Ya, evel-just. Evel e Breizh !